

AR BREZHONEG

dre an henchou treuz

e BRO-DREGER

**BEAR, d'ar 7 a viz Mae
ha d'an 11 a viz Even**

40 euro an daou zevezh


Lakait hoc'h anv :

hentdon@gmail.com

06 43 12 31 67

Titouroù :

www.brezhonegbrovear.bzh/blog



AR BREZHONEG

dre an henchoù treuz

... e Bro-Dreger !

Ur stummadur nevez ha dibar
evit deskiñ brezhoneg ar vro
ha daremprediñ ar gomzerien a-vihanik

D'ar Sadorn 7
a viz Mae
ha d'ar Sadorn 11
a viz Even
e Bear

40 € an daou zevezh
Lakait hoc'h anv : hentdon@gmail.com – 06 43 12 31 67
Titouroù ouzhpenn : www.brezhonegbrovear.bzh/blog

HENCHOÙ
treuz 

**HENT
DON**



Ar brezhoneg dre an henchoù treuz...

Petra eo ?

Ur stummadur nevez ha dibar 'ni eo ! Muioc'h-mui a dud 'vez o teskiñ brezhoneg er skolioù, er c'hentelioù-noz, er stummadurioù hir hiziv an deiz... Mat-kaer, met ur wech tapet ul live « standard » gante, n'eo ket gwall aes mont pelloc'h ganti ha bezañ gouest da gomz ur brezhoneg yac'h ha livet-brav. Evit an dra-se n'haller ket tremen 'biou ar vrezhonegerien a-vihanik. Distank int deuet da vezañ avat, ha ne oar ket atav ar gomzerien nevez peseurt mod en em zerc'hel gante... Gant se 'meump soñjet sevel ar benveg a vanke : ur stummadur a-fetepañ evit sikour ar gomzerien nevez da vont war an tu-se, ha dre se ivez reiñ nerzh en-dro d'ar yezh er vuhez sokial.

Evit piv eo ?

Evit tout an dud barrek da zistripañ brezhoneg dija, ha gante ar c'hoant da vont (kalz) pelloc'h war-du yezh ar bobl. Savet 'meump ar stummadur-mañ gant ar soñj sikour an dud a zo enne ar garg da dreuzkas ar brezhoneg, ha pa vefent buhezourien, skolaerien, kelennerien, stummerien, kazetennerien, ha kement zo... met digor eo d'an holl evel-just ! Tout 'meump da wellaat hor mod da vrezhonegañ evit ma chomo bev ha yac'h hor yezh hag hor sevenadur.

Gant peseurt palioù ?

Meur a bal a vo d'ar stummadur-se :

- anavezout perzhioù dibar brezhoneg bro-mañ-bro (geriaoueg, ereadurezh, pouez-mouezh, sevenadur lec'hel...);
- kompren ar vrezhonegerien a-vihanik ha bezañ komprenet gante ;
- gouzout peseurt mod daremprediñ anezhe.

E berr gomzoù, ar pal pennañ a vo reiñ alc'hwezioù d'ar stajidi, dezhe da vezañ emren evit mont pelloc'h o unan goude-se !

Taoftitpled

Dre strolladoù bihan 'vo labouret, evit ma vo nerzhus hag efedus ar stummadur... Gant se n'eus 'met 10 plas en holl... Lakait hoc'h anv buan !

Peseurt mod 'vo kaset da benn ?

Daou zevezh staj 'vo kinniget e Bear (goude bezañ bet e bro-Fisel hag a-raok mont da lec'h all !), met ur miz etreze o-daou... Evel-se 'do amzer ar stajidi da « lonkañ » an traoù bet studiet gante, koulz ha da labourat er gêr (ya da, un tamm labour-noz 'vo !) Pep devezh staj 'vo rannet e daou damm : er c'hlas deus ar mintin evit labourat war an teoriezh, ha war an dachenn goude merenn evit toullañ kaoz gant brezhonegerien a-vihanik. Gant ur skipailh tud barrek war brezhoneg Bear 'vo kaset an holl brantadoù-se. Evit pep stummadur 'vo pedet un den ispisial da dremen ur pennad-amzer ganimp.